

Gerioù ar vuhez

RKB

▶▶ | Radio Kreiz Breizh

KESTAL

Kestal

Deuet eo ar verb kestal deus ar ger galleg mod-kozh
queste, mont da glask un dra bennak

« Mont da gestal »

Kest, ar gest
Kestoù, ar c'hestoù

Kesterien


Gwechall e veze kalz a dud o vont da gestal :

Baleerien-bro, ar valeerien-bro

Klaskerien-bara, ar glaskerien-bara

Klaskerien-boued, ar glaskerien-boued

Kalimanted, ar galimanted



Gwechall en iliz e veze
graet kestoù. E Purid-Kintin
da skouer e veze lakaet tri
blad da dremen :

Plad ar Werc'hez ,
da gempenn an iliz


Plad an Anaon,
da bediñ evit ar re varv

Plad ar gador,
da feurmiñ e gador

Un enor a oa mont da
gestal evit an iliz. Ba
Tremargad e veze lâret
d'an dud :

« Doue ha Sant Weltaz
d'ho paeo »


Ba iliz Bulad-Pestivien e vez
gwelet un daol vras e-lec'h e
veze lakaet profoù gant an
dud da goulz ar pardon
peotramant e-kerzh ar bloaz.
Seurt taolioù a veze gwelet
alies e traoñ ar c'halvarioù
ivez...



http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudenn_krouet_gant_Malo_Ar_Menn

Da vont pelloc'h

Kit da selaou
An daou gamedad fidel
gant
Ar C'hreiz Breizh
Akademi



COFINANÇÉ PAR
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne / Avec le Fonds européens
de développement régional